


Ar vonarkiezh hollveliel e Frañs

Louis XIV, lesanvet ar roue-heol en deus renet 72 vlez. Levezonet en deus Europa a-bezh get e bolitikerezh. Chom a ra ar skouer ar roue hollveliel dre c’hras doue er XVII-XVIIIvet kantved.



I. Derou ren Louis XIV

Pa varvas e dad , n’en devoe Louis XIV nemet 5 bloaz. Fiziet e voe ar rejans en e vamm, **Anne d’Autriche hag e zibabas ar c’hardinal Mazarin** da gentañ ministr. Padal, droug e savas er bobl en abeg d’an diaesterioù arc’hantourel hag ekonomikel. Rak-se e savas bec’h bras, ar Frondenn a vez graet eus ar bec’h-se (1648-1653) etre Mazarin ag un tu ha Parlamant Pariz hag ar briñsed ag an tu all. Divarrek e voe ar Fronderien da lakaat o mennozhioù da drec’hiñ. Aet skuizh get an dizurzhioù ar bobl a blegas da asanti ma vefe kreñvaet c’hoazh galloud ar roue.

Fronde (histoire), série de révoltes contre la monarchie française, qui éclatèrent de 1648 à 1653, sous la régence d'Anne d'Autriche. Le nom de fronde (une arme d'enfant) leur fut attribué par dérision, pour montrer qu'elles n'étaient pas parvenues à toucher sérieusement la monarchie. Révolte du peuple, des parlements et des princes, elle dégénéra en guerre civile. Cette période troublée de la minorité de Louis XIV devait influencer profondément son exercice du pouvoir et l'orienter vers une monarchie absolue. Elle fut la dernière insurrection de la noblesse française contre la monarchie.

La guerre contre l'empire d'Autriche, commencée en 1635, contraignit la régente et son Premier ministre, le cardinal Mazarin, à lever de nouveaux impôts qui provoquèrent des révoltes populaires en province. Les parlements et la noblesse, titulaires de leurs charges (justice et finance), se sentirent menacés par le pouvoir des intendants, investis par le Conseil du roi pour lever les impôts et créer des tribunaux exceptionnels.

Pendant quatre ans, des revendications non structurées et des pamphlets, chansons, libelles satiriques à l'égard de Mazarin (les mazarinades) animèrent la capitale.

© 1993-2003 Microsoft Corporation. Tous droits réservés.

1. petra eo ar frondenn ? Petra’dalv?
.....
2. Pegoulz e oa?
3. Perak e savas bec’h?.....
4. Piv a gemeras perzh?.....
.....
5. Petra eo ur“mazarinade“?.....
.....
.....
.....

Aet skuizh get an dizurzhioù ar bobl a blegas da asantiñ ma vefe kreñvaet c’hoazh galloud ar roue.

II. Ur roue, ur feiz diell 3-4 p 43

Louis XIV, roue katolik, ne c’houzañv ket e vehe e Frañs ur vinorelezh a dud protestant : n’en deus galloud ebet warne ; Doc’htu en doa ar roue stourmet doc’h ar brotestantelezh. Da gentañ e lakaas da vout heskinet taer en ur lojiñ e tier dezhe an **DRAGONADEGOU** ;

E 1685 e voe sinet get Louis XIV torridigezh ar skrid-embann Naoned (asantet e oa bet ar relijion protestant get Henri IV e 1598 war lerc'h lazhadeg Sant Barthelemy, a-drugarez dezhañ e oa bet achu ar brezelioù relijion) : distrujet e voe an temploù, 250 000 a brotestanted a yeas da glask repu er stadoù protestant a Norzh Europa.

III. Pinvidikaat Frañs diell 1-2 p 42

A.-A-drugarez da G-Colbert e oa diorret ekonomiezh ar vro.

Krouet e voe Manufakturioù (ur savadur hag a strolle degadoù a vicherourien hag a laboure get benvegoù plaen) roueel : sachiñ a rae embregererien estren en ur roiñ dezhe dreistwiriou



Ar roue é welladenniñ manufaktur ar Gobelined a sav pallennoù get Colbert e 1667

- Evit kas war-raok ar c'henwerzh e voe toullet porzhioù evel Brest , An Oriant , krouet kompagnunezhioù kenwerzh evel hini « Compagnie française des Indes orientales », aloubet trevadenoù evel Louisiana ha Sant Domingo.

B. Ar gloar dre an armoù diell 5-6 p 43

Ar brezel hag an trec'hioù a greñvaas galloud ar roue hag ivez e lorc'h : war 54 blezad ren ez eus bet 29 brezel.

-Kreskiñ a reas niver a dud en arme hag er morlu.

Aloubet e voe tiriadoù e Norzh hag e Reter evel Flandrez, Elzas, Frank-Kontelezh, Charolais, Orange, Rousilhon. E-barzh ar lec'hioù aloubet e savas Vauban ur gouriz houarn « ceinture de fer ».

evit en em zifenn doc'h an alouberien.(Camaret-sur-Mer, Mont-Louis, Arras, Lille, Calais, Neuf-Brisach, Besançon...)

IV. Ar gevredigezh edan Louis XIV

A. Tri Urzh er gevredigezh diell 3-4 p 45

-Dreistwiriou e oa get ar gloer hag an noblañs

-Lodenn arall ag ar gevredigezh e oa an Trede- Stad : paeañ a raent an taosoù ; e-touesk an urzh-mañ e oa ar vourc'hizien a faot dezhe bout degemeret en noblañs ; preniñ a raent kargoù, titloù diget ar roue evit bout noblet(roiñ un titl noblañs d'un den).

B. 20 million a dud diell 5 p 44

-War an 20 million a annezidi e oa 85% a beizanted. Int o doa da baeañ tailhoù d'an aotrou, d'ar roue ha d'ar c'hloer.

-E pep kêr e veze bourc'hizien, noblañs hag ar c'hloer. Artizaned e oa ar lodenn vras ag an dud e kêr hag ezel a gevredigezh micherel anvet korfuniadoù(kevredad tud, get ar memes micher, reolennoù boutin dezhe diâr-benn ar labour, ar sevel benvegoù...).

-Buhez ar bobl a oa diouzh an eostoù fall : kresk ar bara> marvezh é kreskiñ.

Labour 2 p 32 : studiiñ krommenn ganedigezh ha marvezh da vare ar Renad